

108



BARZONEK

EN ENOR DA

LA TOUR-D'AUVERGN,

Qenta Grenadier a Franç.

EVIT BEZA CANET E CARAHES, DEIZ LID STATU AN HAROS,

Ar 27 Even 1841, daou-uguent vloas just goude e varo.

Var ton : *Deomp oll, bugale qenvrois.*

SALUD, ô Haros bras Breiz-Izel,

LA TOUR-D'AUVERGN, scoüer ar vaillanç,

Te pini a voe atao fidel

D'ar bannier sacr demeure ar Franç! (2 vech.)

Sell diouzomp diouz lein an êvou

Amà oll etal da imach,

O renta did hor güir hommach

Hac ouz da veuli dre hor moueziou.....

Gloar da LA TOUR-D'AUVERGN, scoüer eus ar güir vaillanç!

Breizis! Breizis! celebromp oll Qenta Grenadier Franç!

Seitec vloas ha pèvar-uguent zo
Carahes a velas guenel
An Haros bras a veulomp hirio,
Vaillanta den a Vreiz-Izel. (2 vech.)
En deiz-mâ, ni, Armoricanet,
Dirac an den ar vaillanta,
Toùomp da veza dign ountà,
Rac ni ivez e Breiz omp ganet. Gloar, etc.

A boan a bemzec vloas voe oajet,
Ma sant e galon o sailla :
Goad Turen' red en e voaziet ;
Birvi a ra d'en imita. (2 vech.)
Redec a ra vit en em vesca
Etouez hor zoudarded vaillant ;
Atao e penn e rejimant,
Netra na ell ountà resista. Gloar, etc.

Mes ar seiz varnuguent a even,
Ebars er bloaves mil eiz cant,
Er penn demeus e c'hrenadourien,
Pa gombatte en den vaillant, (2 vech.)
E creiz ar c'harnach eus ar goassa
E voe lazet gant un toll lanç
Ar C'henta Grenadier a Franç,
Un haros demeus ar re vrassa.....

O devez a c'hlac'har hac a gaon er Franç oll!!!!...
Breizis! Breizis! e c'hloar hepqen hor c'honsol eus e goll.

Eur seurt maro voa dign diountà ,
Peguement m'eo meurbet garo ,
Rac n'eus qet caeroc'h fin er bed-mà
Eguet mervel vit ar vam-bro. (2 vech.)
Coueza' ra evel ur güir haros ,
En eur gombatti gant ardor :
Maro eo er C'hamp-a-Enor ;
En ênv e mà brêmà o repos. Gloar, etc.

O veuli hon Haros en deiz-mà ,
E veulomp an oll vertuziou ,
Rac oll e voant unanet ennà :
Én eo Haros an oll vroyou. (2 vech.)
Lealded , furnez ha vaillantis
A gargue bepret e galon ;
Beza voa scoüer da bep Breton ;
Criomp eta , coziad , yaouanqis : Gloar, etc.

Carantez sacr demeus hor mam-bro ,
Cundu ha harp brec'h peb Breton ,
Ha gra ma en devezo ato
Courach hon Haros er galon. (2 vech.)
Scrifomp bepret var hor guitonou :
LA TOUR-D'AUVERGN, BREIZ-IZEL, FRANÇ,
Hanoyou leun eus a vaillanc ,
Hac a ray tridal ar galonou. Gloar, etc.

Ah ! ra vezo an devez caer-mâ
Gravet atao en hor memor ,
Vit ellout d'hor bugale conta
An hommach rentet d'an enor. (2 vech.)
O clêvet fêjou an den vaillant ,
E clasqint dont d'en imita ,
Evit un deiz ellout beza
Eveltàn leun a gourach ardant.
Gloar da LA TOUR-D'AUVÈRGN , scoüer eus ar güir vaillanç !
Breizis ! Breizis ! celebromp öll Qenta Grenadier Franç !

